

Enskrivañ Inscription

Evit piv : kement den c'hoant gantañ mont war micherioù ar c'helenn divyezhek : skolaer, AESH, AVS, ATSEM, kasour, penngasour, CPE...
Gant DIWAN pe ur skol divyezhek all.

Barregezhioù rekis : Bezañ bet er sesion 6 miz gant Kelenn pe ne vern peseurt aozadur all (reiñ un testeni a-benn neuze). Pe gouzout trawalc'h a vrezhoneg da gemer perzh, priziet e vo ho live da-geñver an emgav.

Enskrivadur : a-raok dibenn miz C'hwevrer, **betek ma chomo plas.**

Priz : 3000 euro ac'hantaouet gant an implijer, 390 euro frejoù enskrivadur e karg ar stajiad. Meur a seurt skoazelloù a c'hall bezañ diouzh ma vez kont gant ar stajiad. ** Sellit ouzh ar roll prizioù war lec'hienn Kelenn.

Darempreduster : m'ho peus diaester pe ziaester, deuit e darempred ganomp.



Doareoù enskrivañ Modalités d'inscription

1- Lizher displegañ ho raktres micher da vezañ kaset da gKelenn, ho CV e brezhoneg da-heul.
2- Emgav e gwir pe a-bell gant ar bodad kadarnaat an enskrivadurioù.

Disoc'hoù Résultats

100 % eus hor stajidi zo laouen-tre.

Da-heul ar stummadur « deskiñ brezhoneg... » he deus bet Claudine ur post divyezhek publik ha laouen eo hiziv an deiz o labourat war-dro ur c'hlasad skol-vamm.

Gaëlle, diouzh he zu, he deus divizet kenderc'hel gant ur master 2 e Kelenn evit kelenn en ur skol Diwan.

Anne-Claire, he deus adkroget gant he labour en ur gevredigezh da vuheziñ atalieroù evit ar vugale e brezhoneg.

100 % eus hor stajidi o deus tapet al live C1 gant an DBY e 2024.



Titouroù / Informations :

KELENN

3 straed Vañde / 3 rue de la Vendée
29000 KEMPER
02 98 95 55 99 - kelenn@kelenn.bzh
www.kelenn.bzh

gant skoazell / avec le soutien de :



Stummadur brezhoneg 3 miz donaat

**Stummadur dibar
« deskiñ brezhoneg
evit
micherioù ar c'helenn
er skolioù divyezhek »**



**Formation spécifique
« apprendre le breton
pour les
métiers de l'enseignement
en école bilingue »**
Approfondissement 3 mois



centre de formation de DIWAN
kreizenn stummañ DIWAN

Sesion donaat - 3 miz

Eus an 22 a viz Meurzh d'ar 25 a viz Even 2027

e KELENN e Kemper,

Session approfondissement - 3 mois

Du 22 mars au 25 juin 2027

à KELENN, Quimper,

Kinnig a ra KELENN ur stummadur 3 miz donaat evit an dud deuet c'hoant ganto mont war micherioù ar c'helenn divyezhek brezhoneg-galleg er c'hentañ pe en eil derez.

Al live a glasker tizhout da nebeutañ da fin ar stummadur eo live B2 an DBY (DCL)*, gantañ e c'haller mont war hini pe hini eus ar micherioù-se.

Eurvezhioù stummañ : 427 h.

Eus al lun d'ar gwener : 09:00 - 12:30 / 13:30 - 17:00.

Ar peadra goulennet digant ar stajidi : paper, kreion.

Ar peadra teknikel kinniget : ur sal glas, ul levraoueg (brezhoneg ha pedagogiezh), dafar urzhiataerezh, dafar kleweled.



*Diplôme de Compétences Linguistiques (niveau A1 à C1). Examen à l'issue de la formation.

** Aides financières selon le statut et le projet professionnel du stagiaire.

Veuillez nous contacter pour plus de renseignements : 02 98 95 55 99
www.kelenn.bzh : Le breton en 9 mois.

DANVEZ AR STUMMADUR CONTENUE DE LA FORMATION

Modul deskiñ brezhoneg

Module d'apprentissage de la langue bretonne

Implij pleustrek eus ar yezh komzet ha skrivet.

Prientiñ an DBY (DCL)*.

Priziañ : - dre gomz dibaouez ;
- priziadennoù dre skrid e-kerzh ar stummadur ;
- arnodenn dre skrid ha dre gomz e dibenn ar stummadur.



Modul degas diazezoù ar c'helenn danvezioù skol e brezhoneg

Module d'introduction à l'enseignement en breton des disciplines scolaires

Studiañ degouezhioù da implijout ar brezhoneg da yezh kelenn eus ar skol-vamm d'al lise. 6 danvez skol a vo pleustret evit ar sesion-mañ : pledet e vo gant ar varregezh yezh, implij an dafar kelenn, an derminologiezh...

Priziañ : arnodenn dre skrid e dibenn ar sesion.



Lec'hienn Kelenn - Brezhoneg dindan 9 miz.

Teuliad studi - sesion donaat

Dossier d'étude - session approfondissement

Sevel un teuliad labour stag ouzh ar c'helenn e brezhoneg.

Priziañ : danvez an teuliad ha difenn an teuliad dirak ur juri.



Stajoù evezhiañ : 2 sizhunvezh

Stages d'observation : 2 semaines

Graet e vo ar stajoù e skolioù Diwan pe divyezhek eus ar c'hentañ pe an eil derez. Stajoù evezhiañ e vint ma klasko ar stajiad kompren gwelloc'h implij ar brezhoneg er c'helenn.

Pourchaset e vo lec'hioù staj deoc'h gant KELENN.



Bremanekaet d'an 16/03/2026